

KANAOUEN EN ENOR JEANNE D'ARC

GLOAR AR FRANS HAG AN ILIZ

*Savet gant
an Aotrou Milin
person
Lambazellec*



KANAOUEN EN ENOR JEANNE D'ARC

GLOAR AR FRANS HAG AN ILIZ

Ton : *Stourm an Tregont*, pe ton : *Plouzeniel-Lambader*

KENTA PENNAD

JEANNE D'ARC E DOMREMY

1

Meulompneur vomez kenvroiz,
Gant hor mam zantel an Iliz
Jeanne d'Arc dibabet gant Doue
Da rei d'ar Frans he liberte.

2

E Domremy Jeanne zo ganet
A dud dister hervez ar Bed ;
Ar Mestr, evit an traou kaerra,
A zell aliez da izella.

3

Pedi, senti ha labourat
A vianik e ti he zad
N'he doa ket brassoc'h levenez
Ar plac'h yaouank leun a furnez.

4

D'an noz, e kornik an oaled,
Keleier trist ken ne glevet ;
Ar verc'h vad a skuille daelou,
A rea d'an Env kalz pedennou.

5

Aberz Doue prins an Elez
Deud'he c'helengant diou zantez ;
Jeanne, selaouit : Varnoc'h ar
A gountevit he delivrans. [Frans

6

Koumpren a rit he nec'hamant ;
Ha ma ve mouez an Trouant !
Mes an arc'hel a gomz startoc'h :
It dienkreiz, Doue zo ganeoc'h.

7125 h, Doue

7

Var ger an Otrou sant Michel
Hag hi da gaout tud a vrezel :
Roit din armou, kompagnunez,
Ma zin betek ar Prins Charlez.

8

Salud da Vab hor Rouanez,
Eb merk ebet m'oc'h anavez
Digass a ran an assurans
E kar Doue bepred ar Frans.

9

Mar de bresset enor Bro-'Chall,
Argurunen evel guechall
Prest var ho tal a lugerno ;
Ouz nerz an Env den ne harzo.

10

Ne doun nemet eur plac'h dister
Mes an Elez zo em c'henver ;
Goulen a ran tud a galon
Da vout ganen var ar Zaozon.

11

An oll a drid ouz he c'hleved
Pebes furnez ! pebez gened !
Plas da Jeanne e pen an arme !
D'he heul ni iel, en han Doue !

EIL PENNAD

JEANNE D'ARC ER BREZEL

12

Klevit e c'hri, soudardet Frans,
Kri a galon, a esperans ;
Araok ! Araok ! al lans var c'hed,
Ha beac'h d'ar Zaozon milliget.

13

Dunois, Xaintrail, Lahir a sko,
A gleiz, a z-ou taôl ar maro ;
Ar goad a ruil', ar Zôz spountet
A bleg bep frap, a rank tec'het.

14

Orlean, Farjo, Bojensy
Viktor Patay dreist peb hini
Zo skrivet e kalon peb den
Ma kount e touez ar Fransizien.

15

Saludomp banniel ar Verc'hez
Livet var lavar an Elez
Gant imaj an Tad en Dreindet
Var bal e zourn a zoug ar Bed.

16

E mesk al lili alaouret
Jeanne er seiz fin he deuz merket
Daou hano ~~mad~~ : Jezuz ! Mari !
He nerz kalon, he oll dudi.

17

Na Jeanne a ioa kaer da velet
Gant e guiskamant dir teuzet,
Var he marc'h guen, soun he ban-
E kreiz tan ha trouz ar brezel. [niel

18

Ar botred ruz goloet a vez
A lavar he deuz sorserez ;
Ar pez zo sklear evidomp-ni
Ema sikour Doue ganthi.

19

Goude 'r Viktor var an dachen
N'he deuz enebour ebet ken :
Daoulina ra, skuilla daelou
O klask pare d'ar gouliou.

20

Guerc'hez divlam ne c'houzanv
Dizurz e touez he zoudardet [kei
Ret e kovez, reseo pardon
Araok staga gant ar Zaozon.

21

Soudardet Frans, pebes kentel
Evidoc'h e kreiz ar brezel !
Ne drec'hot na Prussian, na Sôz,
Ma ne ro Doue deoc'h he vennoz.

TREDE PENNAD

JEANNE D'ARC E REIMS

22

Skubet an hent, mes ean ebet
E Reims ken a vo kurunet
Ar prins yaouank renet ganthi
E triomp da Iliz sant Remi.

23

En he za dirak an aoter.
Jeanne a zispieg e banniel kaer :
Er boan he bet hag er viktor,
Just he ve brema en enor.

24

Kroz ar c'hanol, soun ar c'hleier
A dregern dre bevar c'horn kêr,
Ar Bobl a red a gri louen :
Gloar d'ar verc'hez Jeanne a Lorén.

25

E leac'h m'hen deuz stouet e ben
Clovis hor c'henta Roue kris-ten,
Ar Roue nevez zo kurunet [c'het.
Jeanne d'Arc d'heger he deus dal-

26

Ne glev mui ker splam he moue-
Merke tle kuitat an armou ; [ziou
Mes ne ket avis ar Roue
D'ar Brezel e zeï adarre.

—
JEANNE D'ARC ER PRIZOUN!
HE MERZERINTI! — HE GLOAR!

27

O Jeanne, o guerc'hez burzuduz,
 Mont a rit var roudou Jezuz;
 liet e pignat var ar c'halvar,
 Evit sevel skeduz d'ar c'hloar.

28

Ar verc'hez gant eur bir treuzet
 Gant ar Zaozon zo prizouniet;
 He c'haloun baour zo en anken,
 Jezuz, Mari, deut d'he difen.

29

En he frizoun trubardet yud
 A rod bemdez evel chass mud,
 A zispén he feiz, he vertuz
 'Vit e barn d'eur maro mezuz.

30

Mes kaer ho deuz liva geier
 Jeanne a respount ger evit ger;
 Dirak ar Frans e zeid'an Ee
 Guerc'hez a gorf hag a ene.

31

Klevit oll setans eur bourreo :
 Mervel a rei devet e beo !
 Var blas ar marc'had e Rouan;
 Tud vad eur beden evit Jeanne.

32

Ar Zaôz a c'hoarz, a lam, a you,
 Ar Bobl zo beuzet en daelou;
 Ouz eur pilier Jeanne zo staget
 E kreiz eun tantad preparet.

33

Kouraj, o Jeanne, ar Baradoz
 A zo digor ouz ho kortoz :
 Sellit ouz ho Salver er groaz
 Ha kountit mad var nerz he c'hraz.

34

Ar flam a luc'h, an oll a gren
 Ar verzerez a zo laouen :
 He c'horf a deuz dre nerz an tan,
 Ne glever na klem, na voelvan.

35

Daou c'her hebken en angoni :
 Jezuz ! Jezuz ! Mari ! Mari !
 Ha dindan furm eur goulmik ven
 He nij var eün d'he c'hurunen.

36

Na krainch, na geier tud udur,
 Jeanne ne sklabezont ho figur;
 Skeduz dreist oll merc'hed hor
 Karet bepred c'huï a vezo. [bro,

37

Ho prosez euzuz zo freuzet,
 Arguir d'argaou zo treac'h bepred
 An oll ho meul hag a esper
 E savoc'h prest var an aoter.

38

Guerc'hez, mezzerez gloriuz
 Ni gount var ho sikour nerzuz
 Pa ganomp oll, leun a fizians :
 Gloar hag enor da Jeanne a Frans.

J.-M. M^{ilin}

IMPRIMATUR

André Lambézellec
 Quimper, le 25 Janvier 1895.

E. FLEITER,

Vic. Gén.

En vente au Patronage de Lambézellec, au profit du Patronage.